

Bepred Breizad

Fañch an Uhel : Plouared 1821 – Kemper 1895

Bet embannet e 1865. Gand eur skrid e galleg. Ne vo adembannet nemed ar skrid brezoneg. Modernnaet eo bet an doare-skriva.

Roll ar pennadou

Eur ger a-raog.

Breiz- Izel.

Klemmgan Brizeux.

Mona.

Gwreg ar cheminod.

Kanaouenn ar havell.

Pedenn ar vederien euz ar mintin.

Soezig.

Tina.

Distro an nevez-amzer.

An Itron Varia Sant Kare.

Mervel zo red.

An abardaez.

Eur zon gloareg.

Euz oll vroiou ar bed.

War ar mêz.

Ivona Kerizell.

Ar prad falhet.

Kerez Sant Per.

Eun amzer a zo bet.

Fañchig ha Yannig.

Ar vederien.

Son.

Janedig koant.

Kenavo.

Marharaid an nezerez.

Yez koz on zadou.

Eur ger a-raog

Oll Vretoned a ouenn vad,
Klevet eur ger, tud Breiz-Izel :
-« Ta chomo peb unan Breizad,
Dre-oll, bepred beteg mervel ! –

Broiz, bezet ‘vo ‘vel ha tadou
Eun ha gwirion en pep tachenn ;
Laket enor ‘raog ar madou,
It en peb leh uhel ho penn.-

Dalhet mad d’ho kiziu gwechall,
D’ho kwerziou koz ha d’ho soniou,
Hogen na desket ket re C’hall :
Pedet, dañset er pardonioù.-

Ha c’hwi oll, ar re¹ ‘doug pluenn,
Tud a skiant, ha tud gouizieg,
N’ankouc’hait ket ez oh mibien
D’ar re ‘gomze brezoneg.

Ha ne glevet ket c’hwi lared
On yez, ar gosa, marteze
A zo er bed, on yez karet,
A dle mervel ? - N’glevet ket se ?-

Neb aon ‘ta, oll baotred vad Breiz,
Gorreit- c’hwi bremañ ho penn,
Ha komzet ha skrivet gand feiz
Ar yez koz na varvo biken.

Euz ar vro-bell ma sav an heol
Eo deut ganim ‘barz ar vro-mañ,
Ha mibien Breiz ‘dle he homz oll,
Keid ma skeudo an heol amañ !-

¹ ar re : pere, er skrid orin.

Breiz- Izel

« Lar din, anaoud a rez ar vro
« Leh, war ar garreg ‘sao dero ;
‘Leh kan ar barz war dreuz e zor,
Ha war an aod e trouz ar mor ? »

« Ya, ar vro-ze eo Breiz-Izel ;
War ar bed, pa daolan eur zell,
En neb leh na welan hini,
A houlenn ken braz meuleudi. »

« Lar din, anaoud a rez ar vro
Leh ma kaver c’hoaz war eun dro
Komz Doue hag ar feiz o ren,
Ha reiz hag eeun kalon an den ? »

« Ya, ar vro-ze eo Breiz-Izel. »
Me a garfe ‘vel ar sparfell,
Kaoud diou-askell, evid moned
‘Trezeg ar vamm ‘deus ma ganet. »

« Lar din, anaoud a rez ar vro
Leh ma kren den rag ar maro ;
Ma vever en doujañs Doue,
Ha doujañs lezenn ar roue ? »

« Ya, ar vro-ze eo Breiz-Izel ; »
Evidon beza diouti pell,
D’al leh m’eo chomet ma halon
Ma spered ‘nij evel eur gudon. »

« Lar din, anaoud a rez ar vro
Leh, evel bleun ‘barz ar parko’,
Ma weler ar merhed yaouank
Er pardonious, seder ha koant ? »

« Ya, ar vro-ze eo Breiz-Izel. »
Kudon a nij a-denn-askell
War-zu ma bro, lavar, koulmig,
Deiz-mad da Vona, ma dousig. »

« Lar din, anaoud a rez ar vro,
A gar he hiziou koz atao,
Ma peder c’hoaz en ilizou,
Hag er vered, war ar beziou ? »

« Ya, ar vro-ze eo Breiz-Izel. »
Koabrenn, kaset gand an avel,

Eun tamm d'an douar diskennet,
Ha bete ma bro ma douget. »

« Lar din, anaoud a rez ar vro,
Ma kaner gwerziou ha sonio',
En-tal ar fornigell, beb noz
En koun oberiou ar re goz ? »

« Ya, ar vro-ze eo Breiz-Izel,
Leh ma fell din mond da vervel,
Ha bezañ eun deiz douaret,
Gand ma broiz en o bered. »

« An hini a zavas ar zon,
'Zo eur zoudard, trist e galon,
Hag a varvo gand keun d'e vro,
Mes prest da Vreiz e ve distro. »

Klemmgan Brizeux

Kañvou, kañvou dit, Breiz-Izel !
Hirvoudet ha skuillet daero',
En lez ar mor don, c'hwi, rehell,
En kreiz ar hoajou, c'hwi, dero !

An Ankou kriz, evel eur bleiz,
Pa deu, er goañv, e-mêz ar hoad,
A falh hep truez en bro Breiz ;
E falh a zo ruz gand ar gwad.

Med gand ar gwad-se 'zo c'hwez-vad,
C'hwez ar roz ha c'hwez ar spern-gwenn ;
Gwad eur Barz eo, eur gwir Vreizad,
'Gane e vro en pep tachenn !

Marv eo Brizeux, Barz an Arvor,
Evid bevañ en eur bed gwell !
Kani kañvou, koajou ha mor,
Eostig-noz, klemm a vouez uhel.

Mari ar Vosuter, war he bez
Pedet Doue hag ar Werhez ;
Ha laket eur rozenn nevez
'Uz da galon ar haner kêz.

Hogen, peleh 'vo douaret
Korv ar Barz a gane ken mad
Ar vro ganeom-ni oll karet,
Mor tro-war-dro, hag en-kreiz koad ?

Lakait hañ en Beg ar Raz,
Hag eur peulvan a-uz d'e benn,
Dirag Sizun, ma welo c'hoaz
Al leanezed o tremen.

Pe c'hoaz 'barz an draoñienn Karnak,
Dindan ar mênhir ar brasa,
Ha drem-dostig, eun tu bennag
Eun dervenn 'vo red da blanta.

War ar mênhir rust, digempenn,
Kizellet levrig alaouret,
Hag en dervenn eun delenn
Gand eur chadenn aour 'vo staget.

Hag an avel-mor, o tremen,
A gano gwerziou ha sonio' ;
Hag an eostig war an dervenn

E-pad ar miz a hirvoudo.

Nann ! emezañ, laket ma horv
En disheol koajou Kermelo,
En eun draoñienn en-tal ar Skory,
Eno dousoh me a gousko.

En ho Kademi², Gallaoued,
N'hoh-eus ket goulennet Barz Breiz,
En-deus bepred ken brao kanet
E vro Breiz-Vihan hag ar feiz.

Mad hoh-eus greet, rag er bed all
Ema gand Gwennhlan, Aneurin,
(Eur Hademi ha n'eo ket fall)
Gand Taliezin ha Marzin.

Hogen en Breiz 'zo Barzed c'hoaz ;
Kanet oll e veleudiou
Ar re 'bado er vro mil bloaz ;
Kanit oll, ha svet *gwerziou*.

Me 'garfe c'hoaz, dreist ar mor glaz,
D'on breudeur a chom en pell-bro,
Dpuget war diou-askell pluñv braz,
Gallud laret : « Skuillet daero' ! »

Allaz ! marv eo Braz Breiz-Izel !
Koajou ha mor don, hirvoudet !
« Marv eo 'med evid beva gwell, »
En-deus eur vouez diouh kreh laret. »

² Kademi : galleg "Académie"

Mona

War lez ar ster, he zreid en dour,
Aezet war ar hlazenn flour,
Eun abardaez, Mona Daoulaz
'Oa er prad, dindan ar gwern glaz.

Treuzuz, ha stouet he fenn,
'Oa ar plahig, gand heh anken ;
An daerou euz he daoulagad
'Steredenne war yeot ar prad.

War ar skourr eun evnig bihan
'Lavaras neuze, dre e gan :
« N' strafuillet ket an dour, plahig,
Er giz-se, gand ho taoudroadig ;

Rag n'hellin mui gweled ma skeud,
Na stered an oabl kennebeud :
Selaouet pedenn an evnig,
N' strafuillet ket an dour, merhig ! »

Monig a lavaras neuze
D'an evn a gomze er stumm-ze :
« N'az-pezh doan, an dour strafuillet,
Hebdale pell, 'vo sklêr ha nêt ;

« Med, siwaz ! en deiz ma teuis
El leh-mañ gand Yannig Kariz,
An hini am-eus re garet,
A ! neuze ez oa dit laret :

« O ! na strafuillet ket, Yannig,
Kalon hag ene ar plahig,
Na vint ken glan, na skeudennint ket
Ar stered, an heol benniget ! »

Gwreg ar cheminod³

Da Varz Kerne, Prosper Proux

I

Gaodig Keralsi 'oa eur plah
Seder ha koant, n'heller hen nah,
Ha nebleh ne vije gwelet
Merh yaouank braooh kempennet.

Ya, honnez 'oa eur farodez,
Ha 'viti da vezañ matez,
Er barro-oll ne weljeh ket
Eun all 'vije kaerroh gwisket..

An oll baotred yaouank euz ar vro
He hare, a glaske an dro
Evid ober dezi al lez,
Er pardonious, leuriou-nevez.

Md hi ne ree 'med o goapaad,
Distrei gand fae he daoulagad :
« A-dreñv ! » , 'mezi, « paotred ar zaout !
N'e' ket da seurt a fell din kaoud !

Ne houlennan ket eun debrer yod,
Eur mihieg, eur briz-diod,
Nag ivez eun turnier douar,
N'on ket evid ar rumm-ze, c'hwi 'oar ? »

Gaodig koant, me 'anvez ho tad,
Ivez ho mamm, kristenien vad,
A vev en poan, en paourentez ;
Ho kleved a zo eun druez. »

II

Setu dimezet Gaodig koant,
D'eun den 'hone kalz a arhant,
Ha bet dezi eur Cheminod,
'Zo e ano *Limouzinod*.

Limouzinod 'zo a vro-bell,
N'eo ket ganet en Breiz-Izel ;
'Vel eun aotrou ez e' gwisket,
'Vel eu person ez e' desket.

Ne gomz nemed ar Galleg c'hwek,
Ha fae 'ra euz ar Brezoneg,
Hag euz oll baotred an Arvor ;

³ cheminod : notenn el leor orin : Ar gwerziou-mañ, peurvuiañ, eh heller da gana war eun ton koz bennag.

Hennez 'vad a zo eur pabor !

Karoud 'ra kaer ar chistr, ar gwin,
Hag ar voutaill hag ar chopin
Ez eo binviou, me 'gred,
Peurvuia gantañ 'vez gwelet.

Eiz deiz penn-da-benn eo padet
Dañsou ha festou an eured,
Ma lavare an oll dud fur :
« Kement-mañ 'dremen ar muzur ! »

Allaz ! bremañ 'zo eun dañs all ;
Al Limouzinad, an den fall,
Ne ra nemed foetañ arhant,
Ha pilad 'wechou Gaodig koant !

Gwasoh 'zo c'hoaz, an den diroll,
P'en-eus debret ha lonket oll,
Eur mintin a zo diskampet,
Ha ne oar den peleh eo eet.

Ha setu n'eus chomet netra,
Arhant, na dillad, na bara,
Gand Gaodig paour, 'med eur bugel,
Eur bugelig, prest da henel !

N'en-eus chomet, 'vid oll vadou,
'Med eun tok-plouz, eur hoz bragou,
Boutaillo ha daou gorn butun,....
Gwreg paour, setu hoh oll fortun !

III

Merhed yaouank a Vreiz-Izel,
An dud deut euz ar broiou-pell,
A vez 'vel Aotrounez gwisket,
Cheminoed ha Gallaoued !

Diwallet mad oute, merhed,
Ha n'o hredet ket re abred :
« Med kemeret din eur Breizad,
Eul labourer, eur hristen mad ! »

Kanaouenn ar havell

Kousk aze, ma mabig bihan,
Êlig gwenn, gand e vleo melon⁴,
Kousk aze en kornig an tan,
Eet e' da dad da Lannuon,
Eun oanig gwenn hag eun eostig.
« Kousk aze, bihan, ma halon ».

Kousk aze, bihan, ma halon,
Evdi prena dit eun oanig,
Da dad 'zo eet da Lannuon,
Eun oanig gwenn hag eun eostig .
Kousk aze, bihan, ma halon.

Kousk aze 'n ez liennou gwenn.
Hag e weli, dre da huñvre,
Oanigou an neñv, 'uz da benn
O peuri 'barz ar gliz-beure.
Kousk aze 'n ez liennou gwenn.

Kpusk aze, ma laouennanig.
An oanigou 'ez e' ar stered,
Er prajou an neñv ken koantig,
O redeg, o c'hoari bepred.
Kousk aze, ma laouennanig.

Kousk aze, êlig bleo melen.
Al loar ez e' ar mesaer
Euz ar bleizi 'vid o divenn :
Sell, mabig, pebez da bard kaer !
Kousk aze, êlig bleo melen !

Kousk aze, roue e vammig !
Me 'breno dit eun oan bihan,
'N e houzoug eur brizillonig,
Eur brizllon arhant gantañ.
Kousk aze, riue da vammig !

Kaoud aze prim, ma zurzunell.
Med mar begia an oanig 'vad,
'Teuizo d'he kerhous d'e gavell,
Kousk aze prim, ma zurzunell.

Kousk aze, kousk, ma rozennig.
Kerz kuit, bleiz du, retorn d'ar hoad,
Rag n'az-po ket ma halonig,
Ma mab bihan, kousk, ma rozennig.

⁴ melon = melen (evid ar rim)

Kousk aze, ma mabig bihan,
Koantoh kalz 'vid mab eur roue,
Kousk, ma oanig gwenn, kousk buan ;
Evel en baradoz Doue,
Kousk aze, ma mabig bihan !

Pedenn ar vederien

Euz ar Mintin

Da Varz Breiz-Izel, An aotrou Th. Kemarker

I.

Ken ruz ar glaou-tan er forn, ha lugernuz,
E sav heol ma Doue ; ar mestr oll-hallouduz :
Hirio ‘vezo are⁵ ha kaer ha tomm an deiz,
Ma vo eur blijadur media en parkou Breiz.

Hogen, a-raog an heol, p’ en-deus ar hog kanet,
Oll dud an tiegez kerkent a zo savet,
Ha godue boud skarzet pep hini e skudell∞
Emaint bremañ war hent ar park, hebdale pell.

Gante ‘zo peb a feiz, da gentañ ar baotred,
Ha neuze, war o lerh ‘teu ivez ar merhed ;
Ha heb lared eur ger, ‘heullont ar wenojenn,
Dindan ar bodennou hag en-touez ar raden.

Ar gliz-beure a luh war ar yeod, ‘vel stered,
Ar hlujiri ‘n em halv, a bep tu, ‘n-touez an ed,
Hag ar voualh, hag an drask, hag al laouenanig
A gan oll o zoniou, war ar skourr, ken koantig !

Pep hini ‘zav e vouez hag ivez e bedenn
War-du ‘n Aotrou Doue, hag a gan laouen
Meuleudi an hini ‘grouas pep tra er bed,
‘Raog diskenn d’an douar, da glask e dammig boued !

Hag an den e-unan a chomfe hep sevel
E vouez hag e galon, euz e draoñienn izel,
Etrezeg e Zoue ! An anevaled mud,
Heb gaou, a dalvfe mui neuze evid an dud !...

O nann ! – se vez gwelet, marteze, el leh all,
‘Vel en bro ar Zaozon, ha siwaz en Bro-Hall,
Hogen nann en on touez, nann ‘barz an douar Breiz,
Bro an dud eeun ha mad, o halon leun a feiz.

Sellet ! A-raog pep tra, kent deraoui ‘n devez,
Kent ‘vid lemman ar falz, boulhiñ eun erv nevez,
Setu-int daoulinet ‘barz ar gliz-beure, oll,
O fennou diskabell, troet ‘n tu ar zav-heol.

Ha bremañ selaouet : ar hozañ euz ar vandenn

⁵ are : adarre.

A lavar a vouez sklêr hag uhel ar bedenn,
Hag ar re all neuze a gemer war e lerh,
Daoulinet a bep tu, ‘mesk ar yeot hag ar herh.

II

(Eur vouez heh-unan)

En ano an tad,
En ano ar mab,
En ano ar spered,
En ano an Dreinded.

Amen

On tad an hini⁶ ‘zo ‘n Neñv,
Ra vezo meulet hoh ano ;
Ra deuiio ho rouantelez,
Evel ‘barz an neñv, en on touez.

An oll

Roet dim oll bugale Breiz
Ar peoh hag on bara beb deiz,
Ha pardonet dim on faziou,
‘Vel ni d’ar re a ra dim gaou.

Euz a bep seurt droug on miret,
Ha dreist-oll euz an droug-spered ;
Aotrou, selaouet on pedenn,
Ha ra vo greet ho youl. Amen !

Eur vouez heh-unan

Salud, Mari, mamm ha Gwerhez,
Leun a halloud, a vadelez,
Znnoh on Zalver ‘zo krouet,
Ha dreist an oll oh benniget.

O ! ya, dreist oll gwragez ar bed
Hag ivez ar frouez⁷ a douget,
Ken glan ha ken karantezuz,
Salver ar bed, ho mab Jezuz !

An oll

Santez Mari, mamm d’on Zalver
Pedet ‘vidom en peb amzer,
Bremañ, ha d’an deiz ken garo,

⁶ an hini : pehini, er skrid orin.

⁷ frouez : frouezenn.

Pa deuiio d'on skei ar Maro !

Eur vouez heh-unan

Eur *Bater* hag eun *Ave* c'hoaz,
'Vid traugarekaad on Zalver,
Marvet evidom war ar groaz,
Da voud roet dim eun eost kaer ;

Ha goulenn ma plijo gantañ
Kenderhel dim e vadelez
Hag ivez an amzer-vad-mañ,
'Vid dastum on ed hag on frouez.

Pater Noster, etc...

Bremañ larom *Litaniou*
Ar Werhez Vari, mamm Jezuz,
'Vid ma selaouo on hlemmou
Evel eur vamm garantezuz. ;

Ha 'vid goulenn eur maro mad,
Pa vo red mond diwar ar bed,
Ha beza barnet gand an Tad,
Eub deiz kaer, pe spontuz meurbed !.

Kyrie eleison, etc....

Larom c'hoaz eun *De profundis*
'Vid on oll gerent tremenet
'Vid on mignoned, on broiz,
A zo bet gand Doue galvet :

Eun all 'vid an oll eneou
Dalhet en tan ar purgator,
'Vid ma teurvezo on Aotrou

O degemer eun deiz 'n e hloar.

De profundis 'clamavi, etc.

Eur vouez an-unan

Euz a-greiz puñs don ar poaniou
E krian o brezeg, Aotrou,
Aotrou, selaouet ma hlemmou !

Oll

Troet ho tiouskouarn, ma Jezuz,
Eterzeg ma mouez truezuz,
Ha bezet din karanteuz !

Ar vouez heh-unan

Hervez on droug mar on barnet,
Aotrou, piou a vezo kavet
Gloar a-walh 'vid beza salvet ?

Oll

Med c'hwi warno gand karantez,
Hag a roy dim ar wir vuhez,
Ho lezenn n'eo ket didruez.

Ar vouez heh-unan

Me am-eus fiziañs 'n ho komzou,
C'hwi (zo leun a vadeleziou ;
Ha n'am hollfet ket, ma Aotrou.

Oll

Diouz ar mintin beteg an noz,
Me 'houleñn dalhmad ho pennoz,
Ha gand fiziañs kalz he gortoz.

Ar vouez heh-unan

Rag c'hwi 'zo leun a vadelez,
A halloud hag a garantez,
Evdi preñañ ar peher kêz.

Oll

Ya, c'hwi 'glevo klemm ar peher,
Rag oll int ho pugale ger,
Ha deze oll 'vefet Zalver !

En ano an tad
En ano ar mab,
En ano ar spered,
En ano an Drinded.

Amen

III

Hag an evned bihan 'ree ivez o fedenn,
Hag a gane er gwez, ken seder, 'uz d'o fenn,
'Vel ma kan an oagraou en *O ! Salutaris*,
En-pad an overenn, dindan bolz an iliz.

Ha bremañ, paotred vad, poanerien galoneg,
It, ha boulhet an erv : hag ar gwiniz bouedeg
Dindan ar falziou lemm, ar zegal hag ar herh,
Evel ar foenn er prad, a gouezo war ho lerh.

Al labour 'vez skañvoh goude beza pedet ;
Gret sin ar graoz, hag it. « Bremañ sellet, sellet !
O ! gwella mederien ! « Kerh 'zo er park, e-leiz,
Med oll vezo trohet a-raog diwez an deiz. »

Kaer en-devo zouden c'hwistell an hent-houarn,
O todn euz a Vro-Hall, yudal tost d'o diousskouar,
I na zistrofont tamm, evid selled, o fenn,
Pa vont war o labour, pa vont gand o fedenn ! »

Ha keit ha ma chomo gante yez o zadou,
Keit ha ma lakafont ar feiz 'raog ar madou,
Ha ma pedfont 'vel-se, beb mintin ha beb noz,
'Vid ma skuillo Doue war o foan e vennoz ;

Bezef heb doan ebed : An naer ruz diouganet
Gand Marzin, ar Barz koz, 'hell dond 'n em hwibaned,
A-dreuz on parkou ed hag on lanneieron,
Brzunañ on rehell ha flastrañ on bleuniou ;

Biekn n'hellou boulhañ, neb giz, on halonou,
Na mougañ on yez koz, on gwerziou, on zoniou,
Hag on feiz en Doue, on Aotrou, on gwir dad ;
Peb den en Breiz 'laro : « *Me 'zo bepred Breizad !* »

Soezig

En miz mae, pa vez an heol sklêr,
Pa gan ar voualh, a n alhweder,
E savas Soezig mintin mad,
Ha buan 'wiskas he dillad.

Koef lien war he bleo melen,
Brozig varellet, loerou gwenn :
Ha da redeg dre ar parkou,
Da gutuill a bep tu bleuniou.

Sakñv ha laouen, glebiet he broz,
En-mesk ar yeot, gand ar gliz-noz,
O ! m'ho-pije gwelet Soezig !
Doue, koanta m'oa ar plahig !

Ar helien-aour, ar balafennou,
Kenkoulz hag evnedigou,
A darnije a-uz d'he fenn,
Pep hini gand e ganaouenn.

Ma lavarent dezi : « Deiz-mad !
Deiz mad, plahig ken skañv a droad !
'Vidout eo ken kaer ar bleuniou,
'Vidoyt e kanom on zoniou(«

Hag an heol-zav, euz he gweled
Ken koant, me 'gred, eun tammig,
O voud trehet gand eur plahig ! »

Skañva ha laouen, glebiet he broz,
En-mesk ar yeot, gand ar gliz-noz,
O ! m'ho-pije gwelet Soezig !
Doue, koanta m'oa ar palhig ! »

Tina
Merh ar Miliner

Anaoud a ret Tina Kerc'hoant,
Merh ar miliner, ar plah koant,
Ken brao kempennet d'ar zuliou,
A dañs ken skañv er pardonioù ?

Setu ar plahig dimezet.
« Piou a zoñj deoh he-deus-hi bet ?
Neb he hare 'vel e lagad,
Laouig euz a vilin Rozmad ? »

Nann ! bet he-deus eur genaoueg,
Pinvidig, a gomz ar galleg, »
Ha setu rannet gand glahar
Kalon ar meliner he har !

Laouig a zo karantezuz,
Eur poanier mad, eun den nerzuz ;
Med egile en-deus arhant :
Seru 'n em werzet Tina goant !

Laouig gomze a garantez :
Egile 'gomze a zanvez :
Gand dillad kaer, arhant hag aour
E honezas ar plahig paour ! »

Ma malloz ruz war ar madou,
A dro pennoù ar merhejou !
Gwell eo karantez leiz an dorn,
'Vid aour hag arhant leiz ar forn !

Notenn el leor-orin : Krennlavar anavezet mad en Breiz-Izel.

Distro an nevez-amzer

Da Varz an Aviel

I.G. An Herry.

Ar mintin-mañ, ‘vel ma savis,
Eun heol ken laouen a welisi
Ha me ‘diskenn d’am liorzic,
Skañv ha seder ma halonig.

O ! Doue, koanta da vleuniou
« N touez ar yeot glaz hag an deliou,
Re a beb liou, ha ruz ha gwenn,
Re hlaz, hag ivez re velen !

Me ‘zeblante d’am daoulagad
Evid lavared din : « Deiz mad ! »
E savent ken koantig o fenn
Hag e c’hoarzent pe dremenen.

Ha war bep skourr ‘oa eun evnig,
O kanañ eno e zonig ;
Hag an avel ez oa klouar,
An oable ken glaz ‘uz d’an douar !...

Klebet du-hont al laouenan,
Hag amañ eun drask o kanañ :
Goude eur goañv ken didruez,
E kavont gwelloc’h ar vuhez.

Du-hont en heol, war ar hlazenn,
‘Vel ma lamm an oanigou gwell !
Ha pelloc’h eun ebeul bihan
A re, a red, beteg koll alan !

Mez ma halon, ken trist deh c’hoaz,
A gave ken pounner he hroaz,
Perag ivez m’eo ken laouen,
Prest da ganañ eur ganaouenn !

‘Vel ar prajou, ‘vel ar parkou,
An oanig, an evnedigou,
‘Vel an neñv ha ‘vel an douar,
Eh ankouas kañvou ha glahar ;

Evid kanañ : *Alleluia* !
Ha meulodi ha *Gloria*
D’on Zalver a zo assavet,
Ha deut da frealziñ ar bed !

Hag e teu leun a vadelez,
Gantañ pardon ha karantez,
War e lerh an nevez-amzer,
A laka pep kalon seder !

Kerarborn, an ugent a viz Meurz 1864.

An Itron Varia Sant Kare

*War don : Ar roue Gralon :
« Petra 'zo nevez en Kêr-Iz ? etc...*

I

Yannig Kerlann 'oa eur paotr mad,
Uhel e benn, glaz e lagad,
Ruz e zioujod, e vleo melen,
A gane ge eur ganaouenn.

Er pardonious, leuriou-nevez,
Merhed Plouared, Plounevez,
Oll hen kavet ha kreñv ha koant,
Hag oll o-devoa dezañ c'hoant.

Allaz ! neb a welfe bremañ
Yannig paour, war e wele klañ',
Treur ha dinerz ha droug-livet,
Allaz ! n'hen anavezfe ket !

II

Ar vammig paour a lavare
D'he mab, 'n deiz pardon Sant Kare :
« Yannig, Yannig, ma mabig kêz ;
Sav eun tamm ha deom er-mêz :

« Sell, ma mab, sell kaerrañ amzer !
'Vel m'eo an heol benniget sklêr !
N' glevet ket an evnedigou ?
Dre oll 'zo bleuniou er parkou ! »

« Ma foan a zo ken braz, ma mamm,
Ken na glevan, na welan tamm,
Sklêrijenn an heol benniget,
Na kennebeud kan an evned !

Ma zoñj 'zo gand Marharidig :
Marv e' allaz ! Ma halonig
A zo rannet gand an anken,
Ha na vezo ken yah biken ! »

« Sav, ma mabig ; Doue 'zo braz,
'Degaso dit ar yehed c'hoaz ;
Hirio 'ma pardon Sant Kare,
Ar Werhez az rento pare

Deom 'ta da bediñ ar Werhez,
Leun a halloud, a vadelez,

Honnez yahao da galon,
‘Vid an droug da voud braz ha don !...

III

E-barz an tour ‘vrall ar hleier :
Nag a groaz aour, nag a vanier⁸
A luh an heol, nij an avel,
Nag a bobl, deredet a-bell !

Pep seurt bleuniou ; ha ruz ha gwenn,
« Taoler dirag ar veleien ;
Ha kanou, ha bugaligou,
Gwisket en gwenn, ‘n o dorn goulou.

Jezuz, kaerra prosesion,
En-dro da Iliz on Itron !
War-lerh ar vamm baour hag he mab,
Gand an daerou ‘n o daoulagad.

Hag e pedont hag e kanont,
Hag a-greiz-kalon e laront :
« Mai, karget a vadelez,
Bezet truez ouzim, Gwerhez ! »

IV

Ar Werhez sakr a Zant Kare
Hirio ‘vad, ‘deus d’ober arre !
Gwisket zo dezi sae zeiz-gwenn,
Eur garlantez ‘zo war he fenn.

Hag a bep korn a Vreiz-Izel,
Ha deuz a-dost ha deuz a-bell,
Ar re glañv, ar re vahagnet,
‘N deiz he fardon, ‘deu d’he gweled.

Oll ouestlont dezi kalonou
Rannet gand glahar, pe dornou⁹,
Pe dreid koar gwenn, oll goullet,
Pep hini hervez e gleñved.

Neb a ouestl troad pe galon goar,
A wel prestig goude, heb mar,
Yah e galon ha yah e droad,
D’an oll e ro yehed timad.

⁸ vanier : galleg « mlimère », luhedenn.

⁹ : liester “dorn“.

Kalz 'deuas eno gand flahou,
'Weler bremañ er gourennou,
Pe o tañsal 'barz ar pardon,
Kerkent 'teu ar vombard da zon.

Ar vamm 'gemer eur goulou-koar,
Gwenn 'vel an erh war an douar,
Hag hen gwask en stumm d'eur galon,
Dirag imaj sakr an Itron.

Rei a ra 'nezañ d'he mabig,
Hag e lavar : « Dalet, Yannig,
It da Vamm Doue hen gouestled,
Prest goude yah en em gavfet. »

Yannig 'gemer ar galon goar,
Hen gouestl d'ar Werhez, hag e lar :
« Gwerhez Vari, c'hwi 'zo ken glan,
Me 'fell din lared deoh ma foan.

Deiz pardon Sant Per e welis,
Ditag ar Zant, en e Iliz,
Marharidig... 'Vel ma oa kaer !
Ha me n'oan 'med eur mesaer ! »

Gwerhez Vari, Mamm druezuz,
Mamm da Doue oll-gallouduz,
Noz ha deiz, keid 'vezint er bed,
Me 'vo klevet o lavared :

« Gloar ha meulodi d'ar Werhez,
Leun a druez, a vadelez ;
Kanom oll d'ar Werhez Vari :
Gloar, karantez ha meulodi ! »

V

Ar mab hag ar vamm 'zo kousket
'N eun ti bihan ha paour meurbed :
Setu ma teu tre 'barz an ti
Mamm Doue, ar Werhez Vari.

Heb ober nep trouz ha sioulig,
'Lak he dorn war galon Yannig,
Mousc'hoarzin 'ra ivez outañ :
Mond 'ra kuit, goude kement-mañ.

Diouz ar mintin pa dishunvas
Ar vamm 'oa marv he mab, allaz !

An heol-zav a garge an ti,
Ma seblante c'hoarzin outi.

En em strinka 'ra d'an douar
War he daoulin, hag e lavar :
« Meulodi d'ar Werhez Vari,
A yaha pep poan ha gouli !

Gloar da Vari en peb amzer,
Pa 'deus yahaet ma mab ker !
Ma mab Yannig a zo bremañ
Gand êlez Doue o kanañ ! »

Mervel zo red

Eun deiz mervel a vezo red,
Tremen, kimiadiñ euz ar bed ;
Ya, oll e varvfom, a dra zur,
Paour, pinvidig, ha foll ha fur.

Perag krena, perag gouela,
O soñjal en deiz diweza,
O kuitaad eur bed 'vid eun all,
'Vid unan mad unan 'zo fall ?

Amañ 'ra re domm pe re yen,
Pep seurt droug 'ra brezel d'an den,
Ar horv 'zo brevet gand kleñved,
Atao 'huanad ar spered.

Hag an dud a zo peurvuan
En em debriñ, en em waskañ,
Gwasoh'vid ar bleizi er hoad :
Nann ! ar bed-mañ n'en-deo ket mad !

Nann, nann, 'ne-neus 'med ar re fall
A dle krenañ o vond 'n eun all,
Ha 'vite hepken ar Maro
A vezo spontuz ha garo.

Ne ouelet ket, na spontet ket,
'Vid ar Falher koz da doned,
Tud vad, gortozet eñ heb doan,
Hennez a yahao pep poan !

An abardaez

En eun tiegez en hañv

*D'am mignon an Doktor
André Bijon.*

Setu an abardaez ! An heol 'zo 'vond da guz,
Diskenn 'ra dirag ar roz, hag eñ ken ruz, ken ruz !

Tomm 'vo arre warhoaz, krazañ a ray ar foenn,
Ha darevi an ed ; n'eus ket eur goumoulenn.

Ar yer 'bign war o hlud, ha setu ar vate
O walhiñ ar gaoter : n'vo ket a batatez
Da goan, 'med yod ed-du : ar mevel Youenn vraz
'Deu du-hont ; war e gein gantañ eur beh yeod glaz.

« Laouig, itc'hwi d'ar park, david ar zaout raktal ! »
Hag ar paotr-saout da vond kerkent en eur strakal
E skourjez dre an hent, diskabell, dirahen,
Hag o tremen ar hoad e kan eur ganaouenn

Setu eur bagad saout o tond d'an traoñ d'ar red,
Ha Laouig war o lerh : « selaouet, me ho ped,
'Vel am strak e skourjez, 'vel ma halv peb unan
E zaout dre e honou : *An du, ar vriz[∞] ar voan.*

« Peleh it-c'hwi du-ze ? A-raog, a-raog, *penn gwenn* !
M'ho tegaso du-mañ ! hastet 'ta *ar velen* !
Ha te, taro ar floeltr ! me az tesko, loen fall,
Da dond da enebi evel-se ar re all !

« It oll d'an dour d'al lenn ! » hag ar zaout o vlejal,
Laouig, gand e skourjez hag e vouez o skrijal,
Hag ar moh o houlenn o hoan euz ar vatez,
Setu 'r muzik 'glever en-dro d'eun tiegez ! »

Setu o tond d'ar gêr bremañ ar vevelien :
Darn a zo falherien ha darn all mederien,
Hag oll int skuiz meurbed : abaoe 'r beure-mad
Emaint dindan an heol o vediñ, o falhad.

Nebeud kaer e laront a gomzou en-pad koan,
Nebeud komz an hini 'vez br evet gand ar boan :
Ha koulskoude nikun ne yelo da gousked
A-raog ar pedennou dirag an oll laret.

Al loened 'zo 'n o hraou, an dud 'n o gweleou,
Ha bremañ ne glever nep trouz, 'med a-wechou

D'eun tremener bennag o harzal mouez ar hi,
Da zon an eostig-noz, en dervenn, 'uz d'an ti.

Eur zon gloareg

Da Varz Koad-an-Noz

Y.-M. ar Yann.

Pa oan o studiañ er gêr a Landreger,
Ez oa degaset din lizer da vond d'ar gêr,
Da vond d'ar gêr buan, ma karen gweled c'hoaz
Ma dous, ma harantez∞ Jenovefa Kerloaz.

Ma karen gweled c'hoaz, eur wech a-raog mervel.
Jenovefig paour d'an Neñv prest da nijal.
Doue, pebez kelou ! pa glevis kement-mañ,
Ma halonig 'zemplas, setu-me da ouelañ

Me o paka neuze ma levriou tri ha tri,
Re latin ha galleg, ma haierou studi,
Ha kerkent 'vint en hent, etrezeg Plouared,
Leh ma oa ma dous koant gand ar hleed dalhet.

Trist on 'vel ar Maro, an hini¹⁰ da galoniad !
War an hent e ruille daerou ma daoulagad.
« Ha penaoz goude-ze beva war ar bed-mañ,
Mar deo marv ma Jenou, an hini a garan ? »

War-dro an abardaez, pa oan war an hent braz,
'N-tal chapel Sant Erwan, me kleved son ar glaz !
Ma horv-oll a grenas neuze, 'vel eun delenn,
Pa hwez an avel-nord er faou pe en dervenn.

Ma Doue, ma Zalver∞ na petra a glevan ?
Ar zon-ze a laka ma halon da rannañ.
Mar deo Jenovefa, ma dous koant 'zo marvet,
Me na vin ket ivez pell gouli war ar bed.

« Na lavaret-c'hwi din, plah yaouank, me ho ped,
Da biou e soner glaz, ha piou 'zo tremenet ? »
« Jenovefa Kerloaz, allaz ! koanta plahig
'Oa er vro, 'zo marvet gand keun d'he Hloaregig ! »

Ha me simpliz kerkent ar gomz-se d'an douar,
Beuzet 'barz ma daerou hag ivez ma glahar :
Ar plahig ma zavas, hag a lavaras din :
« Kloareg, youl Doue eo, ar gwella 've pediñ ! »

« 'Vel ar steredenn gaer a luh en hanternoz,
Enni en liorz Doue, er baradoz ;
Kloareg, na ouelit ket, pa varvfet en douar,

an hini¹⁰ : pehini, er skrid orin.

Goulennet mond ganti, dreist an heol hag al loar ! »

Ma kleven an evned 'barz ar gwez, 'uz d'am fenn,
Dre ma'z een gand ma hent, o lavared 'vel-henn :
« Kaerra rozenn ez oa tro-war-dro er vro-mañ
A zo bet kutuillet ; gand Doue 'ma bremañ ! »

Pa arruis en toull ar porz, en Keralsi,
E welis ar horv paour douget e-mêz an ti :
War eur penn an arched ez oa eur garlantez
A vleuniou ar parkou, spern-gwenn, brug ha bleun-lêz.

War an hent 'gas d'ar bourk 'kane ar veleien,
Ha me heuille ivez dre 'r parkou penn-da-benn :
An daerou a strinke stank euz ma daoulagad ,
An drez a diroge ma zreid ha ma dillad.

En-pad an overenn, pa oa 'r horv en iliz,
En penn ar aoter-noz war ar bez on chomet,
'On chomet war he bez, da bedi, da ouelañ,
Ma c'hoantain he heuill ha mond euz ar bed-mañ.

Hag am-eus goulennet neuze digand Doue
M'he gweljen c'hoaz eur wech, 'vel pa oa en buhe',
M'he gweljen c'hoaz eur wech ha ma komzje ouzin,
Neb ze ; o ! ma Jezuz, gand glahar e varvin ! »

Na pa oan o retorn d'ar gêr euz ar vered,
Ar maro 'n em halon, eur skeud am-eus gwelet ;
E welis eur skeud kaer, 'vel ma saven ar roz,
He dremm dostig d'ar ster, war-dro an hanternoz.

Hag e sklêrijenne 'vel an heol benniget,
'Barz an nevez-amzer, o para war ar bed :
Evel Jenovefa 'oa gwisket oll en gwenn,
Hag e c'hoarze ouzin, hag e laras 'vel-henn :

« Tavet, ma dous Kloareg, tavet, na ouelet ket,
Me 'zo bet gand Doue lammet diwar ar bed
Evid on mad on-daou, ma vefet beleget,
Ha 'barz ar baradoz ma hellfom 'n em weled. »

Neuze 'pignas d'an Neñv, ken kaer hag ar stered,
Ha ma halonig paour kerkent 'oe frealzet.
Youl Doue da vo greet, dre-oll 'mañ e lagad,
Ar pezh 'deus da ober, 'vidom 'dle beza mad ! »

Me 'zo bermañ Person en parroz Plouared ;
War vez Jenovefa leh ma'z eo douaret,

Am-eus hadet roz ruz hag ivez lili gwenn,
Hag eno am gwelez aliez en pedenn.

C’hwez vad ‘zo gand ar roz, kaer eo al lili gwenn,
‘Uz d’he bez an eostig a gan en ivinenn ;
Hag e gan « zo ken kaer ma seblant din, beb noz,
Kleved mouez an êlez a gan er baradoz.

Euz oll vroiou ar bed

Euz oll vroiou ar bed, Breiz-Izel da genta !
Na deus arhant nag aour, med se ne ra netra :
Eno 'ma 'r baotred vad, ar merhed a enor,
Ar feiz er halonou, ha tro-ga-dro ar mor.

Euz oll yezou ar bed, n'ez eus ket a garan
'Vel hini Vreiz-Izel, honnez eo ar gaerrañ ;
N'ez eus hini er bed a ve ivez ken koz,
Adaleg ar zav-heol, beteg an hanternoz.

Euz oll blahed ar bed, da genta hini Vreiz !
Honnez 'zo eun teñzor a furnez hag a feiz ;
Bepred drant ha laouen, ema en tiegez
'Vel an heol benniget, 'skuill dre-oll levez.

Euz oll gizioù ar bed, ez eo re Vreiz-Izel
A garan dreist an oll, 'r re-ze 'vel an avel
Na droont ket bemdez :an nerz hag ar yehed
A roont d'ar horvou, hag ar peoh d'ar spered.

Euz oll gwerzioù ar bed, re Vreis 'zo da gentañ
Ha 'vel-se pa ven trist, 'n em lakaan da ganañ
Eur werz koz euz ar vro, eur werz pe eur zonig,
Ha kerkent da dridal laouen ma halonig !

Euz oll vroiou ar bed, Breiz-Izel da genta !
N'he-desu arhant nag aour, med se ne ra netra ;
Eno 'ma 'r baotred vad, ar merhed a enor,
Ar feiz er halonou, ha dre-oll ar mor !.

War ar mêz.

Da varz ar gêr a Iz,
Olier Souvestr.

Em hoañze war ar yeot, dindan eur gistinenn,
Tost d'eur hleuz goloet a vleuniou-balan melen,
E sellen a beb eil an oabl hag an douar...
Hag an heol a oa sklêr, hag an avel klouar.

Ma lavaren 'vel-henn : « Brava ma'z eo bevañ
War ar mêz, en noz Mae ! » Dre-oll 'weler bremañ,
Er hoajou, er prajou, deliou glaz ha bleuniou,
Ha dre-oll 'zo c'hwez-vad, er parkou, en hentchou.

Ar goukoug, ar gudon hag ar voualh beg-melen
A gan a bep tu din ; beteg a-uz d'am fenn
'Zo eur piñsin¹¹ bihan, ken koantig, ken seder !...
'Vel ma sav bet' an oabl mouez skiltr an alhweder !

Du-hont, pell, e klevan, 'barz ar prad, o vlejal
Eun taro, ha pelloh, eur marh o hourinal...
Med a beleh e teu kement-mañ a hwez-vad ?
N'eo ket ar bod burlu 'zo aze euz ma zroad.

« Nann, pa droan ma fenn, e welan du-hont, pell,
Er park, eur bod spern-gwenn : ahane an avel
'Degas ar c'hwez amañ. – Setu en Pouared
Eur vadeziant a zon ! – Kleier ma bed, sonet ;

Spnet ha gret d'anaoud da bep hini er vro
Ez zo eun êlig gwenn war on douar distro !
Ar hleier 'zon laouen, - med ar bugel a ouel.
Lavar, petra eo dit goude 'vel-se, bugel ?

Da dad 'zp ken laouen, hag an deiz 'zo ken kaer !
Penn-da-benn war da hent eostig hag alhweder
A gane ken koantig ! Er harz hag er parkou
Ez oa kan, ha c'hwez-vad dre-oll gand ar bleuniou.

Med an heom a diskenn a-dreg ar roz,
Kleier at Hoz-Varhad 'glevan son ar glaz-noz,
Pierrig ar paotr-saout a dastum e loened,
'N em strakal e skourjez d'ar gêr eo koulz moned.

Setu 'vel tremenan ma deveziou amañ ;
Evid levr ganin 'n em dorn, - med hep selled ennañ ;
Ez ab euz park en park, euz faouenn da dervenn,

¹¹ piñsin : pinter.

Pe 'n kreiz ar yeot uhel, ar bleuniou 'uz d'am fenn !

Kerarn, Miz Even 1863.

Ivona Kerizell

*D'am mignon ker :
Amédée Jourdain.*

En Kerizell 'zo eur plahig,
Hah anon Mona, pe Monig :
Er vro na gavfet ket he far ;
A-greiz ma halon me he har.

N'en-eus ket er bed a gomziou,
'Barz en nep tiez, nag a zoniou,
Evid lared, hervez ma hoany,
Pegement ez eo fur ha koant.

Kaerroh eo 'vdi an heol, pa bar,
Euz ar mintin war an douar,
Ha freskoh ivez 'vid ar roz,
Pa vez glebiet gand ar gliz-noz.

He horv 'zo ken mistr ha ken moan !
Ha 'vel al lili ez eo glan ;
Ken bihan, ken skañv eo he zroad,
Ken lemm ha ken glaz he lagad.

Heñvel ez eo euz eun oanig,
A lamm en-kichenn e vammig,
Da viz Mae, en-touez ar bleuniou
Hag ar raden, 'barz ar prajou.

He bleo a zo hir ha melen,
Hag he halonig ken laouen !
He zal a zo eun hanter loar ;
D'an Êlez, me 'gred, ez eo c'hoar.

He sell 'zo tomm ha birvidig,
He mouez n'vel hini an eostig,
Pa gan, en noz, 'kichenn he neiz,
Er gwez uhel, en koajou Breiz.

He dioujod a zo ruz ha gwenn,
He muzellou, diou gerezenn,
Ken fresk, ken koantig ha ken flour,
Ma teu an on genou an dour !

He dent a zo 'vel eur bagad
Oanigou gwenn e-barz ar prad,
Ha gand heh alan 'zo c'hwez-vad,
'Vel ar gwezvoud, pe 'r spern, er hoad.

O ! brava ma'z eo da weled,
D'ar zuliou, pa vez kempennet,
Eur hoof dantelez war he fenn,
Eur groazig arhant 'n he herhenn !

Broz mezer, botou rubanet,
Hag eun davanjer marellet,
Ha hi ken sard, ken skañv a droad,
Ken sklêr ha ken lemm he lagad !

Nann, en oll barrojou en-dro,
N'en-eus ket eun all 'barz ar vro,
Ken koant ha ken fur ha Monig,
Monig Kerizell, ma dousig.

Setu-me ugent vloaz oadet ;
Da vloaz e tennin d'ar billet ;
O ! ra blijjo gand ma Doue
Na vin ket soudard d'ar Roue !

Ar Person koz on badezas,
Neuze 'vad on eureujiñ c'hoaz,
Dirag Doue hag ar Werhez,
Ha Sent on bro hag an Êlez !

.

Ar prad falhet

*Da Varz Bro-Hall
Charlez a Vro-Hall.*

Setu falhet ar prad ! – Deh pa’z on tremenet,
‘Oa plijadur gweled, ‘n touez ar yeot, ar bleuniou,
Ken srad o daoulagad, ken pinvidig livet ;
Ha selaou ar skrilled ‘kana d’e’ dro zoniou !

A beb ment, ‘oa eno, hag ivez a beb liou,
Re hlaz ha re velen, ha re ruz ha re wenn,
Hag oll ez oant laouen, goude ar gwall-deiziou,
Ha ken koantig ‘savent, pa dremenen, o fenn !

Palavennou kaer Doue, ha c’hwiled alaouret,
Ha kelien ruz ha glaz a ree deze al lez ;
An heol hoarze oute, an heol kaer benniget,
Hag an evned ‘gane tro-dro e-barz ar gwez.

Allaza ! er mintin-mañ eur falher diremed
A deuas gand e falh, hag hep keun na truez,
An den fall digalon oll en-deus o falhet !
A ! ma halon ‘zo leun a dristidigez !

Me ‘oar eur falher all, e ano ar Maro,
Hag a falh ‘n touez an dud ; a had dre-oll glahar ;
Koz ha yaouank, eun deiz, oll, oll on diskaro !
N’am-eus neb aon outañ, galloud ‘ra dond, ma kar !

Kerez Sant Per

*Da Varz Roc'h-Allaz
Rannou.*

D'ar houlz m'oa on Zalver c'hoaz nebeud anavezet,
Ma 'h ee dre an hentchou war droad, en peb amzer,
En eur ober ar vad, gand e Abostoled,
Eun deiz en em gave tost da eur gêr dister.

Bezañ on tro kreizteiz : an heol 'oa lugernuz,
Ha nebleh eun disheol, nebleh eul lommig dour !
Ma welas an Aotrou, ar Mestr ollgallouduz,
Eun houarn-marh er poultr, koz, ha torret, ha flour.

Ma lavaras da Ber : « Sav din an houarn-ze ! »
Per na rez van ebed, mui evid eur bouzar :
E spered 'oa troet gand traou all d'ar houlz-se,
Ha na deurveje ket 'n em bleaga d'an douar.

Petra huñvree Per ? – Rouantelez ar bed !
Ya, an Abostol braz a glaske en e benn
Ar gwella renadur : -huñvreoù kaer meurbed !
Komz euz eun houarn marh, disterra kavadenn !

Eur gurunenn avad !... Neuze c'hoaz marteze...
Med 'vid eun houarn-marh, ne dalveze ket ar boan.-
Ma tremenas eta, pa glevas ar gomz-se,
Hep selled euz eun dra ken dister ha ken moan.

An Aotrou, war e lerh, a deurvezas plegañ,
'Vid dastum an houarn, heb lavared netra...
Neuze, pa degouezjont da vond er gêr vihan,
E werzas anezañ, 'barz ar hovel genta.

Tri diner heb gwerzas. – O tremen ar marhad,
E welas kerez kaer ; ma oant ken flour eno,
Ken ruz, ma lakaent seder an daoulagad ;
Euz o gweled, hepken, 'teue 'n dour er geno' !

An Aotrou a brenas kerez 'vid tri diner,
Ha, heb lared netra, en e vañch o lakaas.-
'Barz eun nebeud goude, setu-int 'mêz ar gêr,
Hag en hent adarre, pell dezi d'ober c'hoaz.

An heol 'oa tomm bepred, nebleh eur voudenn flour,
Kennebeud eur boud glaz, - med poultr, ha poultr bepred !
Ker en-dije roet Per 'vid eul lommig dour :
Ma oant oll poaniet braz gand tommder ha sehed.

An Aotrou yee a-raog. – Heb ober van, laoskas
Eur gerezenn d’an traoñ. Per lammas war ar frouez
Kerkent, e-barz ar poultr, ha buan he lonkas,
Ha ma lavare c’hoaz : « Gwella tra eo kerez ! »

‘Barz eur pennad goude, ‘kouez eur gerezenn all :
Setu Per da blega ‘vid he zizoud arre. –
Eun all ! eun all ! eun all ! ha re vad, ha re fall...
P’en-doe pleget kant gwech, an Aotrou lavare :

« N’out ket skuiz c’hoaz, Per baour ? Ma karjes boud pleget
Eur wech, ‘bar ar houlz vad, ‘vid an dra boud dister,
‘Vid kalz disterroh c’hoaz n’az-pije ket tanket
‘Vel-se plega kant gwech, ha ken braz poan kemer !...

*

Setu eur gentel vad aze ‘vid pep hini, -
War ar mêz ‘vel en kêr, tudou a bep stad,
Re binvidig, re baour, yaouankiz ha kozni,
M’ho ped, he selaouet, ‘vid an oll ez eo mad !-

Eun amzer a zo bet

D'am mignon Arzur de la Borderie.

I

Eun amzer a zo bet, ha na vije klevet
On-touez nemed yez Vreiz : war ar mêz 'vel en kêr,
Oll 'komzem ar yez koz gand on zadou komzet,
En Gwened, en Kernev, Leon ha Landreger.

Eun amzer a zo bet, 'oam gwisket 'n eur hiz all ;
Pep hini 'n-doa tok-braz, bragou braz ha chupenn,
Ha ne oam ket heñvel 'barz en Breiz euz re Hall,
Ha ne oa ket touzet on bleo hir war on fenn.

Eun amzer a zo bet, 'vel on-boa on dillad
Disheñvel euz re Hall, 'oa ivez on giziou,
Hag en-mesk kant neuze e kavjeh eur Breizad,
Hep poan ebed, raktal, e-barz an oll broiou.

Eun amzer a zo bet, 'weljeh on ilizou,
En kêr 'vel war ar mêz, leun a dud daoulinet,
Bep sul ha beb gouel-berz. - Neuze er pardonioù
Na vije ket dañset a-raog beza pedet.

Eun amzer a zo bet, 'vije klevet en Breiz,
En hentchou, el lanneg, ha war lein ar menez,
A bep tu, da guz-heol, war-dro an abardaez,
Kanañ ar gwerzioù koz hag ar sonioù nevez.

Eun amzer a zo bet, soudarded Breiz-Izel
'Oa doujet en peb leh, hag ar Zaoz milliget¹²
A dehe diraze, pe e ranke mervel,
(Rag re Vreiz ha re Zaoz biskoaz n'int 'n em garet).

Eun amzer a zo bet, na garem ket, a-grenn,
Gweled tud divroet, - re Zaoz, pe re Vro-Hall,
(Rag ni, a beb amzer, 'zo bet kaled on fenn),
O vond da werza dim eur yez hag eur feiz all.

Eun amzer a zo bet, hag ez oa eun enor
Beza ganet en Breiz, beza anvet Breizad,
Hag e vije laret : « *paotred an Arvor !* »
Ha kement-se 'oa gwir. Hennez « oa 'n amzer vad ! »

II

¹² milliget : notenn el leor orin : Dans nos campagnes on prononce rarement le mot Saozon (Anglais) sans l'accompagner de cete épithète.

Peleh 'ma an amzer-ze ? Peleh ema, siwaz ?
Ha ni 'dle beza oll Saozon pe Gallaoued ?
N'eus ket a Vreizaded 'barz en Bro-Hall c'hoaz,
Ni ar vibien hena, marteze, euz ar bed ? »

Marv ez eo eta Arvor ? « Nann, ar paotr koz, m'hen goar,
Karget e izili a liammou houarn,
'Zo astennet e gorv bremañ war an douar,
Euz hen diwall Yann Zaoz, ha Gallig al Louarn.

Tro-dro, kornandoned louz ha fall, a-vagad,
A lamm, a dañs, a-hir. – « Marv ez eo ar paour Arvor !
Setu-heñ diskaret ! o ! ya, marv ez eo,, marv mad !
Marv eo ! marv eo ! matv eo ! - Taolom e gorv er mor ! »

Piou a gomz e-giz-se ? – Paotred Saoz pe re Hall ?
Nann, nann, n'hen deo ket marv, med kousket eun tammig ;
Kanet, kanet izel ; m'hen gwelloc'h o fiñval
E viz bihan hepken, gand spont e varvfeh mik.

Diwallet ! diwallet ! mar kanet re uhel
E hellfe dishunvi : n'hoh-eus ket c'hwi ket gweled
Kleze braz ar Gwesklen, ar paotr mad er brezel,
E zorn dehou warnezañ ? – M'hen lar c'hoaz : diwallet !-

Mar dishun ar paotr-mad (ober 'ray marteze)
Neuze ho-pezo keuz, neuze 'vo eun dañs all !
Saozon, c'hwi hen goar mad, eo pounner e gleze,
Ha c'hwi na hoarifat ken er giz-se, paotred Hall !

Neuez 'vezo kelvet : « You ! you ! dir en avel !
El lanneg, er menez, war-zav, war-zav dre-oll !
Arzur 'gerzo ganeom, paotred vad Breiz-Izel !
Arzur, Doue ouspenn, kerzom, n'hellom ket koll ! »

Plouillo, miz Eost 1863.

Fañchig ha Yannig

D'am mignon : Emile Grimaud.

Deh d'abardaez, goude 'n tommder,
Pa oan o vale dre 'r parkou,
'Klevis eur vouez uhel ha sklêr,
O kana war-du ar prajou.

« Me a ya eur wech c'hoaz beteg ti ma mestrez,
Ha pa gollfen ma foan, greet am-eus aliez :
An du a lavar din am-eus amzer gollet,
Ha me, 'vid o hleved, bepred n'o hredin ket.

Ha me 'chom 'n em zao da zelaou :
Ha ma klevis neuze souden
Eur vouezig all, en-toue ar faou,
An hini¹³ a gane, 'vel-henn :

« Korvet brao e' ma mestrez, bale a ra ervad,
Ruz eo evel eur rozenn, ha glaz he daoulagad(«

Euz o moueziou 'oa anad mad
Na oant c'hoaz nemed bugale,
O vesa ar zaout 'barz ar prad,
Unan 'oa plah, paotr egile.

« Janig, 'skrije ar paotr Fañchig,
« Peleh out-te, pa n'az kwelan ?
Sav da viz d'an neh eun tammig. »
« Sell ! sell ! ma gweled 'rez bremañ ? »

« Na ran ket da ! deuz 'n-kreiz ar prad,
Du-hont eo 'tal ar vuoh penn-gwenn. »
« Sell ! » « A ! bremañ az kwelan mad,
Gadn da vroz hlaz, ha diarhen. »

« Diêz da zaout da diwall ? »
« Ya ! Ma hole ha ma buoh du
War ar melchon, 'barz ar park all,
«'Vel ma pellaan, 'vez diouhtu.

« Peogwir kasi da zaout d'ar gêr ? »
« Pa zono 'n Angelus ; ha te ? »
« Ha me ivez. » « Te az-pezh amzer
D'ober 'vel ma karez goude ? »

« Se n'eo ket gwir ; red 've din c'hoaz

¹³ An hini : pehini, er skrid orin.

Gwalhi patatez, hag ober
Tan dindanne, beteg boud poaz,
Ha 'lez pura ar gaoter. »

« Ha me : lakaad boued d'ar hezeg,
Klask ar moh, ha lakaad 'n o hraou,
Klask an deñved 'barz al laneg,
Eun hanter lev, heb lared gaou. »

Fañchig, deus amañ eun tammig. »
« Mond 'ree ma zaout da laerez. »
« N'aint ket, evid eur pennadig :
Me 'm-eus avalou, ha kerez ! »

« Avalou ? te 'teus avalou ? »
« Ya, ma faotrig, re ruz, re vad ;
Me roy dit leiz da hodellou,
Med 'rabad 'vo lared d'am zad ! »

Ha Fañchig dreist ar hleuz er prad !
Setu-hañ en-kichenn Janig,
Skañv, birvidig e daoulagad,
Ha 'n e greiz 'lamm e galonig.

Ha c'hoarz, ha kan, ha levenez !
M'o gwel bremañ du-hont, o-daou,
War o fenn peb a garlantez,
En o hoañze dindan ar faou.

Gantez a-leiz bep seurt bleuniou,
Burlu, bleun balan ha spern-gwenn,
Ha bleuniou all, a bep seurt liou,
Hag i o kanañ a bouez-penn ! »

Keit-se ar zaout 'zo o laerez,
War ar haol ha war ar melchon,
War an ed hag ar patatez :
Ma tegouez mamm Fañchig, Fañchon.

Allaz ! ha kerkent an taoliou
Da goueza war ar paotrig kêz,
Ha taoliou dorn, ha bahadou :
A-walh ! a-walh ! mamm didruez !...

A ! Fañchig paour, a ! paotrig kêz,
Neb huñvre kerez, avalou,
Euz ar merhed na dap liez
Med kalonad hag ankeniou !

Kerarborn, e miz Gouere 1863/

Ar vederien

*Da Varz Sant Larañs
an Aotrou Klezan.*

« Gwaskom, paotred, gwaskom ! en penn an erv, Fantig,
‘Gerho eur pichad chistr ! – Stard, Erwan ha Gahig !-
« Gwella da Vederien ! – Gleb dour int gand ar c’hwez !
War o lerh an irvi ‘n em holo a damouez ! »

‘Vel-se ‘komze eun deiz Laou goz d’e vevelien,
En eur parkad gwiniz, ‘, zav war ar vevenn.
Neuze ‘pije gwelet ar falz o vond en-dro,
Ha war an erv ken stank ‘ouezañ an ed daro !

Ar skrilled a gane a bep tu o zoniou,
Hag an evned bihan, er gwez, ‘mesk an deliou :
Hag an heol ‘oa ken tomm ! ha gand ar c’hwez treuzet,
O rochedou kanab war o hein ‘oa peget.

Neb ger ne lavarent. Fañch-vraz ez oa er penn,
Ha distaolet gantañ ha botou ha chupenn ;
Fañch-vraz, gwella mevel ez oa nebleh er vro ;
Na vije ket kavet e bar deg lev tro-dro.

Goude Fañch-vraz ‘teue kerkent Erwan ar Meur,
Ha war e lerh, Yannig an Taleg hag e vreur,
Paotred vad ‘barz eur park, pe gand trañch pe gand falz,
Labourerien galed, ‘vel ma zo ‘n on bro kalz.

Eun tammig war o lerh Eflamm Kerborio
‘Boanie stard, ‘n e gichenn Fantig Kerloho.
Allaz ar plahig paour n’hellje heuill birviken
Mar ne raje Eflamm an hanter he lodenn.

Ha ma luhe an heol, ma kane an evned,
Hag ar falz, ‘vel eun naer, ‘ruze en-mesk an ed,
Hag ar gwiniz trohet, ken pounner, ken melen,
‘Holo an irvi, war o lerh, penn-da-benn.

Emaint en penn ar park ! Setu ‘tond ar vatez,
Ha war he fenn ganti lêz kaoulet ha krampouez.
A ! gwella ma kavfent bremaig o merenn,
‘N o goañvez war ar yeot, en skeud eur goz dervenn !

Eur hornadad butun ‘vezo greet goude-ze,
Eul lommig gwin-ardant ‘vo ivez, marteze.
Oll o gwelfet laouen, hag heb damant d’o foan ;
Ha d’al labour kerkent, beteg ma vo koulz koan !

Labourerien ma bto, mederien galoneg,
Ar re¹⁴ a bed Doue bemdez en brezoneg,
Warhoaz emañ ar zul : goude an overenn
Er pardon e tañsfet, lammfet war ar hlazenn ;

Ha pa guzo an heol, e teufet d'ar gêr,
O c'hoarzin, o kana, laouen ha dibreder.
Eflamm a breno kraoñ-amañdez da Fantig,
Hag Erwan ha Fantig 'ambrougo o dousig.

Ha d'al lun 'labourfet arre, hep keuz na klemm,
Ma bez mad ar hrampouez, ha mar bez ho falz lemm ;
Ha 'vel-se, arrufet ken brao gand ar Maro,
Hep keuz ebed, na spont, degouezo pa garo !

En Plouared, miz Eost 1864.

¹⁴ Ar re : pere, er skrid orin.

Son

Tri aval ruz, tri avalig,
Am-eus, hag a zo ken koantig !
Hag an neb am haro raktal,
'Roin dezañ ma zri aval.

Ma avalou a zo ken flour !
Euz o gweled hepken an dour
'Deu en genou ar baotred koant,
Hag oll e varvont gand ar c'hoant !

Gab Rozmad ha Laouig Gwillou,
A garfe kaoud an avalou ;
Hogen unan 'zo kemener,
Hag egile eur mesaer.

An oll a lavar ez on koant,
Ha koantiri a dalv arhant :
Me a fell din kaoud eur mabig,
Euz a di mad, ha pinvidig.

Pa oan o kanna war al lenn,
Eun evnig 'laras 'uz d'am fenn :
« Hoh avalou 'weñvo, merhig,
O roit buan da Laouig ! »

Kenavo d'am zri avalig,
Ken flour, ken tuz ha ken koantig !
Da Laouig o hasan raktal,
Hennez 'debroy ma zri aval !

Tri aval ruz, tri avalig
Am-eus, hag a zo ken koantig !
Hag an neb am haro raktal,
'Roin dezañ ma zri aval.

Janedig koant

*D'an Aotrou Troude
Reizer yez Vreiz.*

En hañv, da viz Even, pa vez koulz ar falher
Da falhad ar prajou, pa gan an alhweder,
Ar goulm, an durzunell, pa vez leun ar parkou
A ed-glaz, a velchon, a-hwez-vad an hentchou ;

Pa luh an heol en oabl, pa ra peb evn e neiz,
Er harz pe er wezenn, eu lun, da abardaez,
Janedig koant 'lare da Ivona Rozmad,
Pa oant o horo ar zaout, o-diou, en korn ar prad :

« Bezet droug, bezet mad gand an neb a garo,
« Na ran nemeur a forz, me 'lar hag a laro,
Er bloaz-mañ 'timezin ! » Tortet gand ar gozni,
Hag ar boan ; Gaodig koz neuze 'laras dezi :

« C'hwi 'vad a zo klasket dreist an oll, Janedig,
Gand tud yaouank ar vro ! med diwallet, merhig,
Rag c'hoa oh yaouank ; dibabet din bepred
Eur penn-tiegez mad, gand parkou ha loened.

Yannig al Lagadeg 'zo eur paotr stummet mad,
Nerzuz ha kaloneg, koulz 'vel ma'z eo e dad ;
Ne ev ha ne hoari ; hennez 'zo den a-benn,
Leun ez zolier a ed, hag e graou a ohen.

An oll er vro her goar, e dud 'zo pinvidig,
Ha mar karet selaou, 'larin deoh, polezig :
« Heb madou, peurvuia, 'vez berr ar garantez !
Diwezatoh 'welfet ha me 'lar gwirionez. »

« Yannig al Lagadeg ! eur genaoueg 'vel-se !
Ha da betra 'dalfe din-me boud koant neuze ?
Kement kar e gezeg, e zaout, ar paotr Yannig,
Na gavfe ket amzer d'am haroud eun tammig !

« Komzit din euz Jobig, a vilin ar stankvraz,
Gand e vleo melen-aour, hag e zaoulagad glaz !
'Vid eur ger-mad euzañ, pe 'vid eur zerr-lagad,
Me a rofe gwech Yannig hag e oll vad ! »

« O ! plahig he fenn skañv ! diwallet, an amzer
'Zo kriz ha didruez, hag a ziskar en-berr
Karantez yaouank ; ha goude, aliez,
Ne chom mui 'med paourentez, anken ha dienez ! »

« Lavaret din, mamm-goz, petra 'rin gand arhant
Keit ha vin karet, ha yaouank flamm ha koant ?
Prena kezeg ha saout, dastum eur yalhad aour ?
A ! gwell eo karantez, pa dlefen beza paour ! »

Dimezet eo bremañ, Janedig d'he Jobig,
Ha pell-amzer a zo eo tremenet Gaodig :
Bennoz Doue gantez, ha komzou ar warh-koz
Ra deuint ket d'ankenia spered Janed en noz !

Kenavo

*D'am mignon ha kenderv
P. Ar Luyer. Kabiten en Gward an Impalaer.*

Kenavo

Kenavo, Mari, ma dousig,
Kenavo, me 'ya bremaig
Du-hont, dindan ar mogero',
Da vervel, o tivennn ma bro !

A bep tu 'tenn ar hananou,
A bep tu 'son an trompillou,
Red e' moned a galon vad,
Hag heb aon, 'vel eur gwir Vreizad !

Me 'yey gand eur galon laouen,
Er renk kenta, uhel ma fenn ;
Me 'varvo hep keuz, 'vid Doue,
'Vid ma bro ha 'vid ma Roue.

Kimiad, kimiad evid ar bed,
Leh na dleom ken 'n em weled,
Ni 'n em gavo en Neñv eun deiz,
Gand oll zoudarded vad ar feiz.

Ar boudodou a-uz d'am fenn,
En êr, a hwistell o tremen,
Oll 'mañ an tan er mogero',
A bep tu 'welan re varo.

Setu, setu deiz an eured !
Ma gwad-me eo gwin ruz ar pred,
Hag ar hanon hag ar hleron,
En leh ar biniou, a zon !-

Deus 'ta, deus 'ta, ma halonig,
Ma termenin war da vizig
Ar walenn a briadelez,
Kaerroh 'vid hini Rouanez.

Kimiad c'hoaz, kimiad 'vid ar bed,
Bez koun euz da zoudard bepred,
Marvet 'vid e vro hag e feiz,
'Vel peb bugel mad euz a Vreiz !

Marharaid an nezerez

*(Da Varz Laouenanig Breiz,
Milin.)*

I

War gwenojenn ar bourk, bemde', pa dremenan,
E welan eur plahig war he harr o nezañ,
Eur plahig koant ha fur, lagad du, bleo melen,
Hag en he zi balan ken seder he halon !

Atao war dreuz he dor e kan 'vel eun eostig,
Eur zon nevez bennag, eur werz koz, eur hantig,
Hag o kana soniou ha gwerziou koz ar vro,
He dornig skañv ken brao a gas he harr en-dro !

En deiz all, 'n em guzis 'vid selaou ar plahig,
A-dreg eur voujenn hlaz, 'zo 'n-kichenn he hêrig,
Ha setu ar zonig a gane he mouez sklêr,
'Vel eul laouenanig, pe 'vel eun alhweder.

II

« Ma harr, ma gwerzid, ma hegell,
Ha ma neud-lin war ma hinell,
Gante ouzon gounid bara,
'Vid se o haran dreist pep tra.-

« Dreist pep tra, goude ma mammig,
Ma mammig paour ha ma zadig,
Ha goude on Zalver Jezuz
Hag ar Werhez vadelezuz.

« Ma harr, te a ro din dillad,
Eneb ar goañv kriz ha divad,
Hag er marhad me 'werz ma neud,
Ha d'ober krampouez, a bren bleud.

Me 'breno c'hoaz gand ma harrig
Eur hog ruz hag eur bolezig,
Ha marteze eun oanig gwenn,
Kerkoulz ha Soezig Liboudenn.

Nezom 'ta, nezom kaloneg,
Kerad ez e' ma neud, daou wenneg
Al livr, er marhad diweza...
An heol n'eo ket greet da guza.

Foennerien 'zo du-hont er prad,
Treuzet gand ar c'hwez o dillad...
Gwelloh, gwelloh kalz eo beza

War dreuzou ma dor o neza !

Dre-oll a zo bremañ bleuniou,
« Barz ar parkou, war ar hleuziou ;
Bleun balan, spern-gwenn ha burlu
‘Welan en-dro din, e bep tu.

An evened a gan ‘uz d’am fenn,
Er wezenn faou heg en dervenn,
Hag an durzunell, er hoajou.

« Euz o hleved, ha tost ha pell,
Me ‘gan ivez a vouez uhel,
Hag al lin diwar na hegell
Ez a en neud war ma hanell.

« Med kuzet ez e’ an heol, me ‘gred,
Ha war ma harr ez on bepred :-
Bar zegal, lêz ha krampouez,
Ha setu koan eun nezerez !

Re all ‘zo a debr bara-gwenn,
A debr kig-bir, ev chistr melen,
An dud pinvidig ar re-ze, -
N’int ket eurusoh, marteze.-

Liez o gwelan o tremen,
Dibaot ez o gweled laouen,
Atao ‘zo eun dra o nehañ,
N’o hlevan morse o klemm.

Me ‘houlenn euz Zalver ar bed
Heuill e hourhemennou nepred,
N’houlennan ket pinvidigez,
Bevañ ha mervel nezerez.

Ma harr, ma gwerzid, ma hegel ;
Ha ma neud-lin war ma hanell,
Gante ‘ouzon gounid bara,
‘Vid-se o haran dreist pep tra !

Yez koz on zadou

Piou 'lavar ez e' marv en Breiz
Spered ar re goz hag o feiz,
Hag e kollom on yez beb deiz ?...

Piou 'larvar 'vezo ar Galleg
A dreho ar Brezoneg,
War an derv kaled, an haleg ?

Beo-mad e' spered on zado',
Ha keit hag ar bed e pado,
Rag mui karom 'vid mado'.

On gwerziou koz, ni o han c'hoaz,
Er menez, war aod ar mor glaz,
'Vel hirio, o hano warhoaz.

Keid ma zo brug en Breiz-Izel,
Hag en aod ar mor glaz rehell,
On yez koz na hell ket mervel.

Kaset skolaerien war ar mêz,
En peb bourk, en pep tiegez,
Evid ober brezel d'on yez ;

Kaer ho-pezo kas skolaerien,
Paotred Vreiz 'zo kaled o fenn,
Ha n'o zelaoufont ket a-grenn.

Mar na drohet ket teod ar bugel,
Kerkent ha ma teu da henel,
'Vezo poan gollet o brezel.

Ha mar bez on beg alhwezet,-
Euz o beziou, en peb bered,
Ar re goz o sevel 'welfet ;

'Vid deski d'on bugaligou
Komz o yez ; kana o gwerziou,
Ha darempredi ar pardonioù.

Leusket tud Vreiz, paotred Vro-Hall,
Leusket int, ma reont tra fall,
Troet o spered e leh all.

Leusket ganeom on hoz gizioù,
On ilizoud hag on hroazioù,
Ha yez ar re 'gousk 'n o beziou.

On hontadellou ‘tal an tan,
Goude al labour hag ar boan,
En-pad ar goañv, a-houde koan.

Leusket ganeom on beleien,
‘Vid lared dim an overenn,
A glev peb unan penn-da-benn :

Ar pardonious pa deu an hañv,
Leh ma’z im oll, ha yah ha klañv,
Da bedi, dañsal hag evañ.

Ar re yaouank d’ober al lez,
D’ar plahig koant, ar benherez,
C’hoataont d’hanter-tiegez.

M’hen tou, bugale Vreiz biken
Na raint dizurz en nep tachenn,
Ha n’e em glemfont ket a-grenn.

Hogen lazañ on yez karet,
‘Vid-se, tud Hall, na refet ket,
N’ho-pezo ‘med amzer gollet.

‘Vel ar bleun balan er parkou,
En douar Breiz ‘zav ilizou,
Kroaziou-mên, soniou ha gwerziou !

Keid ‘vo kerreg en aod ar mor,
‘Kano ‘barz-koz war dreuz e zor,
Bepred en yez koz an Arvor !.